



CANTIC

EN

ENOR DA SANT VICTOR.

CABITEN.

(pour la translation de ses reliq. à N. D. de Crann, à Speret.)

C'hoant emeus da gomposi evit ar Vretonned,
 Eur c'hantic da Sant Victor, mignon ar Soudarded.
 Santout araon ma c'halon, ma speret dizouten,
 Evit cana Sant Victor, enor ar Gristenien.

Speret-Santel, disquennet eus an eou em c'halon ;
 Sclærigenet ma speret, ha blêinet ma ræson.
 E Marseill e voa ganet ar Soudard vaillant-ma,
 Euz a guerent distinguet, ac eus an re nobla.

Achu ganta e studi, Victor, c'hoas yaouanq flam,
 A zo casset d'an arme, gant e dad ac he vam.
 E squiant, e vaillantis so remerquet souden :
 Choaset eo gant an arme evit beza Cabiten.

Guerc'hès gloriüs Vari, c'hui so sûr e Intrôn,
 Astennet ho torn santel da sicour ho mignon.
 Condui a ra d'ar gombat e soudardet vaillant ;
 Dridal a ra e galon gant un ær triomphant.

E vare'h fier-didanna en doug d'ar c'homajou :
 E goad e ennemiet e trempo e armou.
 E pen e oll soudardet ar brezellour yaouanq,
 Dirac e ennemiet so joaüs ha contant.

Abars commanç ar gombat en em adress bepret
Da Zoue an armeou ha da Zænt benniguet.
Caret a raffe mervel e pen e soudardet ;
Mæs da victoriou caëroc'h Victor so resevet.

Trehet en deus en eun tol e oll ennemiet :
D'ar guær et teu triomphant e pen e soudardet.
Lùn a c'hloar ac a driomph, partout eo enoret.
Gant an noblanç, ar brincet ac an Impalaëret.

E fianç en he Zoue se bet bebret constant ;
Rac ar bed a so sujet da lies chanchamant.
Bepret d'an Impalaëret, Victor so oboissant ;
Mæs o lezennou cruel en rent desoboissant.

Un impalaër dinatur, hanvet Maximien,
A ordrenas distruja quement e voa christen.
Victor bepret courachus, bepret victorius,
A gonfort ar gristenien dre e gomsou nerzus.

Evel eun æl gardien, betec ar chafodou
E tispos ar verzerien da souffr o zourmanchou.
Eur garantez quen ardant ac exemplou quen caër,
A denn souden, var Victor, drouc-graç an Impalaër.

Questionnet var e zoctrin, e feiz ac a lezen,
Victor a respond hardi penos e zeo christen.
Ordren a rer da Victor adori idolou ;
Oc'h idolou, emeza, so tout drouc-sperejou.

Mervel mil guech, emeza, evit lezen Jesus,
Quentoc'h evit commetti un torphet quen scrijus.
Maximien, fuloret o clèvet e gomsou
A string Victor er prison, carguet a jadennou.

E jadennou so pounner, mes e galon joaüs
A so hastet da veza unisset gant Jesus.
Dre brissonniet eo Victor, e zivrec'h guyellet,
Ha Sclæjet dre ar ruiou gant eur marc'h fuloret.

Ar ruiou a so trempet gand e voad precius,
Ac e gorf santel rentet en eur stat truezus.
Victor sclæjet d'ar prison evel eur c'hriminel,
A eston e vourevien dre e gourach santel.

An Impalaër a ordren lacat e gorf en noas :
Dispennet eo a doliou ha staguet eus eur groas.
An toliou cruel o deus e vemprou disjoëntet,
Mæs e galon gant Jesus so bepret unisset.

Ma Salver, eme Victor, n'am abandonnit quet ;
Rac mar manq din ho sicour, sûr evezin trehet.
Nan, nan, ma mignon Victor, n'oc'h abandonnin quet :
Pel-so oc'h-eus meritet an hano a zouguet.

Confortet eo ar merzer dre gomzou e Jesus :
E creis e oll dourmanchou e galon so joaüs.
An tyrantet o c'houzout e voa beo Victor c'hoas,
A ordrennas en instant en disquen eus ar groas.

Ar merzer so prisonniet evel un anneval ;
Mæs Jesus en delivro eus e brison tènval.
Eus an eôu abers Jesus, ælet so disquennet ;
Dor ar prison zo digor, ha Victor delivret.

Redec a ra ar Merzer da dy an Impalaër,
Evit discleria deza e zelvranç quen caer.
An Impalaër fuloret, a ordrenas timat .
Prizonnia c'hoas ar merzer, mæs eur vech evit mad.

Distroi a ra de brison contantoc'h vit biscoas :
E goustianç so tranquil, e galon joaüs bras.
Prometti a rer deza enoriou, cargou caer ;
Mæs Victor a gar guelloc'h drouc-graç an Impalaër.

Gardou carquet da veilla, en dro deza placet,
Dre eur sclærigen brillant a so tout estlâmet.
Payanet cruel e voa gardou Maximien ;
Mæs Victor dre c'hraç Jesus o rentas christenien.

Discleria rezont hardi e voant convertisset,
Ractal e zint condaonet da veza dibennet.
Condaonet eo ar Merzer da vez bruzunet
Dindan men bras eur vilin ; mæs c'hoas eo preservet.

Ar mèn torret e daou beza a brouvas sclæramant
Penos e voa proteget gant un dorn puissant.
E gorf so dibastellet, mæs e deod eloquant
A drucarecat Jesus, den renta triumphant.

Imach infam Jupiter, placet var un auter
A so d'an douar foulet dindan dreid ar Merzer.
Ordren a rer en instant trobi e droad deza :
Hastit buan, bourevien, hast am eus, emeza.

Erfin, evit curuni quement a victoriou,
Victor a so dibennet, ha pignet en évou.
Eus an eôu eur voëz squiltrus ractal a so clêvet :
Triomphet e teus, Victor, eus da oll dyrantet.

Enor ha gloar da Victor da veza combattet
Evel eur soudard vaillant, gant Jesus delivret.
O Sant Victor benniguet, ô Merzer gloriou !
C'hui a so bet eur c'hristen, guir soudard da Jesus !

Chui a so brema eurus, ni a vezo ivez
Mar combattomp gant couraich bete fin hor buez.
O pobl a barrez Spezet, deoc'hu pebez enor !
Da veza bet recevet relegou Sant Victor !

Eus a Rom int digasset gant an Ilis hor mam,
Da eur chapel so hanvet Intron-Vari-ar-C'hrann.
Douguet int bet e triumph, evit ar vech quenta,
En ur procession brillant celebret er bloa-ma.

Bep bloa da zeis ar pardon, hanvet Sul an Dreindet,
So induljançou plénier d'ar c'hristen accordet.
C'hui oll Bretonned yaouanq, d'an arme destinet,
Quemeret evit patron Sant Victor curunet.

En em hastet da zouguen relegou Sant Victor,
Celebret gouël ar Merzer gant triumph ac enor.
Dre e sicour et trehoc'h oll ennemiet,
Evit guêlet un devez palæs caër an Dreindet.

AMEN.

A. R. p. St.-Evan¹rec.

Approuvet gant an Autrou KERAUDY, viquel-general an Autrou Escop,
d'an 11 devez a mis gouère 1845.